

Melestradur ar Stad

Penaos e ra ar Stad evit meriñ an tiriad gall ?

Ur stad unvan eo Bro C'hall get ar melestradur greizennel ar Stad a c'hell d'ar gouarnamant kas àr-raok e bolitikerezh ha lakaat e-pleustr al lezennoù. Kreizennet eo ar galloud e Pariz met galloudegezh ar Stad e vez reprezantet àr tout an tiriad gall èl an DDASS evit an aferioù yec'hed a zo ul lodenn en departamantoù a lakaa e-pleustr divizoù Ministrerezh ar Yec'hed.

« pep tra a ya kuit a Bariz met pep tra a zistro e Pariz ».

I. Melestradur e servij ar Stad




Diell 1 : gouarnamant ha melestradur Pennadoù Bonreizh ar Vvet Republik, 1958.
 Mellad 20 : Termeniñ ha kas a ra àr-raok ar Gouarnamant politikerezh ar vroad. Emañ en e gerzh ar melestradur*.
 Mellad 72 : E-barzh strollelezhioù tiriadel*** ar Republik, dileuriad ar Stad (prefed**), a reprezant pep ezel ministrerezh ar Gouarnamant, en deus kargoù èl kontroliñ ar melestradur, lakaat da vout doujet doc'h al lezennoù hag ivez interestoù ar vroad.

*=hollad kargidi ar Stad e servij ar ministrerezhioù (5,5 milion a dud)

** : krouet get Napoleon e 1800, anvet get ar gouarnamant a reprezant ar Stad en departamantoù get kargoù èl lakaat e-pleustr al lezennoù, surentez hag urzh foran, kontroliñ mard eo lezennek aktoù ar strollelezhioù tiriadel.

*** : kumun, departamant, rannvro


Diell 2 : Pastelloù-bro : rann velestradurel Frañs

	Niver	Karg	Kargoù arall
<u>Ar rannvro</u> 	22 + 4 (Guadeloupe, Martinique, Guyane, La Réunion) Kuzulierion rannvro dilennet evit 6 vlez	Al liseoù	- diorren ekonomikel - skoazell an embregerezhioù - kempenn an tiriad
<u>An departamant</u> 	100 (95 er vetropolenn+ Guadeloupe, Martinique, Guyane, La Réunion) Kuzulierion veur dilennet evit 6 vlez (dre kanton)	Ar skoloù + trañsportoù-skol	Obererezh sokial dresit-holl - RSA, gwarez ar bugaleaj, tud kozh
<u>Ar c'humun</u> 	36778 Kuzulierion ti-kêr dilennet evit 6 vlez	Skolioù kentañ derez ha skolioù-mamm	Obererezh tro-dro d'ar c'humun - lastez, servij ar rolloù keoded, hentoù,

1. Petra eo rol ar prefed ? diell 1
2. Get piv e vez anvet ?
3. E-barzh an diell 2, adlakait ar gerioù en o flas mat : is-prefed, prefed-rannvro, maer.

II. Skouer ar velestradurezh : hini an Deskadurezh broadel

4. Leuniit an daolenn



diell 3

III. Ar strollezhioù tiriadel

Diell 4: lezenn an digreizennadur

Pennadoù ar Lezenn n° 82-213 d'an 2 a viz Meurzh 1982.

Mellad 1: En em ren a ra ar c'humunioù, an departamantoù hag ar rannvroioù dre g-kuzulioù dilennet (...)


Titl III- Gwirioù ha frankizoù ar rannvro.

Mellad 59: Strollezhioù tiriadel eo ar rannvroioù. Melestret int get Kuzul Rannvro dilennet dre vouezhiadeg hollek eeun.

War-lerc'h an tabut hag ur votateg e vez kmeret an divizoù get ar C'huzul Rannvro.

Mellad 14: karget eo ar c'humun ober àr-dro ar skolioù, evit an departamant e rank ober àr-dro sevel, kempenn ha dispignoù mont en-dro ar skoloù. Karget eo ar rannvro da ober àr-dro al liseoù.

Diell 5 : budjed 2003 er rannvro Breizh e milmilion euro



5. Displegit petra eo ar strollezhioù tiriadel ? diell 4
6. Get piv e vez melestraduret ? peseurt diell a lâr-se ? diell 4
7. Penaos e weller kemer perzh ar strollezhioù tiriadel e buhez bemdeziek ar geodediz?
Diell 5
8. A ven e ta lodenn vrasañ ar savadoù (gounidoù) er rannvro Breizh ? diell 5
9. Hervez al lezenn war an digreizennadur e 1983, peseurt kargoù a zo bet treuzkaset d'ar strollezhioù tiriadel ?
10. Perak e c'hellomp lâr ez eus muioc'h a demokratelezh get an digreizennadur ?